

— 7 —

**CHANSON****POTRET PLOUILLAU**Var ton : *Adieu, Pontréo.*

M'am bije sperét da gompreñ, evel a meus fantazi,  
 Me a vije n'em impliet da zonhet da gomposi  
 Eur c'himiat leun eus a c'hlaç'har, grët da gonscrityvet  
 yaouanq  
 O deus tennet ar billet du ebars er blaves prezant.  
 Ebars er bla mil eis cant c'hoec'h, ar bemp a vis guen-  
 golo,  
 E zeo digueet adare etts a baros Plouillau  
 Tud yaouanq evit an arme, tud eus ar re derrupla ;  
 Glac'haret è o oll ligue, p'o guelont o partia.  
 Da bartia gant an actif ne zeus qen nemet pèvar :  
 Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar Meledar,  
 Ha Yannic Prat eus ar Goajou ha Pipi an Aveant :  
 Pèvar den eus ar re vrava, corfon caer ha tud vaillant.  
 Ervoanic Jacob a lare en deiz-se d'he gainarad :  
 Emâ a zo un devez trist hac a ra din calonad !  
 Guelet va mam baour o vouela, ha va zad qèz desolet !  
 Va c'halonic ebars em c'hreiz zo dija qazi rannet.  
 Calz a sonchfe dè, marteze, penos e ven eur poltron,  
 Em be aon rac eun ten fuzuil pe rac eur voufed canon,  
 P'otramant aoun rac ar fatiq, o vale dre an henthou,  
 Pe gousqet var eur guele can ebars er c'hordegardou.  
 Douguen va dillat var va chouq, va fuzuil ha va zabren,  
 Bale bemde a guér da gnér dre ar fanq hac ar vouffen ;  
 Ha goude e fin va beach rancout marteze campi,  
 Pe gousqet var an douar yen, pe otramant bivoaqi.  
 Tor o deus an neb a sonch se ; ma c'halent lenn en  
 c'halon  
 Evit guelet va bolonte ha va inclination,  
 Ma na fotse nemet va goad, me en sculfe tout joaùs  
 Evit souten hon Impalaér, eun tad qer carantezuz !

## — 8 —

Piou na gombatfe qet hardi gant un Impalaér christen?  
 Eur gaus quer just hac e hini a zo facik da zouten,  
 Pa zomp mémprou da Jesus-Christ, soudardet an Aviel,  
 Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-Santel.

Arça eta, camaradet, qent quittad eus hor c'hontre,  
 Demp ni da ilis Pôuillau da suplia hon Doue  
 D'hor preservi demeus goal chanç pa vezimp en armeou,  
 Ha da gonsoli bars er guêr hon tadou hag hor mamou,  
 Adieu déc'h, Autrou sant Millau, patron eus ar barous-mâ  
 Adieu, querent ha mignonet, cessit brêma da vouëla.  
 Pedit Doue hac ar Verc'hes da gavet soign ac hanomp,  
 Hac hon Æl-mad d'hor c'hunduo partout elec'h ma ze-  
 fomp,

Adieu, va mab, va esperanç, eme an tad desolet;  
 Piou a gonsolo da dud paour goude ma yi partiet?  
 Pa vin accablet gant cosni, me vo clévet o laret;  
 Ma vije va mab qez er guêr, en dije va soulajet.

Clévit ar vam o qimiad ive digant e buguel:  
 Deus amâ c'hoas ma poqin eur voech qent eguet mervel,  
 Aben ma retorni d'ar guêr, me vo éd eus ar bed-mâ  
 Deus amân etre va divrec'h evit ar voech diveza.

A guichen ar moment fatal ma c'heus tennet d'ar billet,  
 Bemnos vel ma fot din cousket, me a seblant da velet  
 O tont eus eur gombat sanglant, var eur chariot blesset  
 Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonet.

Ar soudard yaouanq contristet c'hoas qent eguet partia  
 Evit essât o c'honsoli a lavar, en eur vouela:  
 Tavid, va zad ha va mam baour, ha bevit en esperanç,  
 Doue, tad a vizericord, a so bras e brovidanc.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,  
 Gant graç Doue hag ar Verc'hes; e vezò fin d'ho clac'hар.  
 Evit merq eus hor vaillantis, gant lore deus hon tocou,  
 Ni a zistroyo prest d'ar guêr evit sec'hi a taëlou.

Adieu da baros Plouillau ha de oll habitantet  
 Adieu d'hon oll anaoudeguez, ha querent ha mignonet:  
 Ha ma na memp qet ar boneur er bed-mâ d'en em velet,  
 Graç deomp ebars er barados assembles d'en em gayet.